

(256, suite)

Guerrz
Reneaïc ar Glaz .

Reneaïc ar Glaz a lavare
D'e zad ha d'e mam ~~un~~ deiz a vae : (bis)

(257) Va zad ha va mam, ma vec'h contant,
Da benner Kveziou m'ema be c'hoant . (bis)

Evit penner Kervezziou c'houi n'ho po get,
Ervanec Gelard ne lavaran get . (bis)

Ennes eo penner an arc'hant hac an aour,
Ha perc'hen Kveziou a so paour . (bis)

Se na ra netra da zen abet,
Ha pa ven gentañ o clasq va boued . (bis)
Na p'am bezo-me bet va souhet.

Reneaïc ar Glaz a lavare
Ebars er gueguin pa antrée :
Petra so a nevez an ti-mañ,
Ma medi ar ber diourz an tan,
Ar pod-fer bras hac an hini bian . (bis)

(258) Ganêc'h, Reneaïc, oump estonet,
Hac en varc'hoas genta hoï'h eured . (bis)

Mar m'ha varc'hoas genta va eured,
Eleal certen na vouien get . (bis)

Na me a ya brema da gousget,
Hac evit ellout sevel abret . (bis)

Evit ellout sevel mintin mad,

Evit ellout quisca va dillad. (bis)

Erwoanic Gelard a lavare
En ty ar Glaz cos, pa errue : (bis)

Debonjour ha joa oll en ty-mâ :
Reneaic ar Glaz pelec'h e mâ ? (bis)

Emedi er gambr en ~~em~~ visqi :
Kit d'ar nec'h, Erwoan, consolit-hi. (bis) (259)

Evit e c'honsoli na rûn qet,
Cresqi e glac'har dei na rûn qet. (bis)

Debonjour d'ec'h Reneaïc coant,
Ha d'ec'h-hu, emei, intaon yaouang. (bis)

Nac itron Varia ar Drindet,
~~Nac~~ evit intaon en c'hemeret ? (bis)

Ho gemeret intaon ne ran qet ;
Aben tri de amâ e velfet. (bis)

Reneaïc ar Glaz a lavare
D'e mategz vian neuz e ene : (bis)

Digas din-me plûn, liou ha paper,
Evit ma scrifin-me ractal ul lizer. (bis)

Evit ma scrifin-me ur billet,
Da benner Kverjou vo casset. (bis) (260)

Ar vategz vian a lavare
Ebars en Kverjou pa errue : (bis)

Debonjour ha joa oll en ty-mâ :
Mab kema 'n autrou pelec'h e mâ ? (bis)

Emedi na var e vele clân :
Hit d'ar nec'h, mategz, consolit-ân. (bis)

Evit e gonsoli na rûn qet ;

Crespi e c'hlac'har ne larian get. (bis)

Debonjour d'èc'h, Autrou. Penos a ret?
Me so deus tout expres d'ho quelet. (bis)

(261) Na petra glesques amâ, mateg?
Hac hi eo demezet da vestrez? (bis)

Cetu arze ul lizer, lennit-ân,
Ha quelit petra so varnezân. (bis)

Ha na dre ma lenne al lizer,
E coeze e zaelou var ar paper. (bis)

Perc'hen al lizer a verq amâ
Ne deus get tri devez da veva. (bis)

Ha dide, mategic e larian:
Me ne meus get teir-heur a gredân. (bis)

Na penner Kverjou a lavare
D'ar vateg vian eno neuze: (bis)

Digas din pluen, liou ha paper,
Eit ma scrifin-me ul lizer. (bis)

(262) Eit ma scrifin-me ur billet;
D'am douq Reneaic e vo roet. (bis)

Reneaic ar Glaz a c'houlenne
Digant e mateg pa erve. (bis)

Mategic vian, lavar din-me
Petra en devez contet dide. (bis)

Din-me n'en devez contet netra:
Cetu e lizer, lennit eta. (bis)
Ha quelit petra so varnezân.

Reneaic ar Glaz a lavare
Na deus porz e zad pa sortie: (bis)

412

Me dol va mallos a galon vad
Gercoulz var va mam vel var va zad. (bis)

Ha var ar re a rag tud yaouang,
Pa n'o lezont get da gaout o c'hoant. (bis) (263)

Ervoanic Gelard a lavare
En ilis parros pa errue. (bis)

Roit din-me ho piz, Renea,
Ha liqin ar voalen varneza. (bis)

Deus ar voalen na meus drouc ebet;
Demeus e ferc'hen ne laran get. (bis)

Reneaic ar Glaz a lavare
E ty e mam gaer pa errue. (bis)

Roit din scabel da arza,
Mar down ar verc'h-caer diourz an ty-ma. (bis)
Ha servieten d'am disc'hoerza.

Ganec'h, Reneaic, omp estonet,
Ha c'houi noc'h eus get ranget qerzet: (bis) (264)
Var eur marc'h bouach hoc'h bet douquet.

Reneaic ar Glaz a lavare
Da Ervoan Gelard eno neuze: (bis)

Ervoanic Gelard, mar am c'heret,
Grit-hu ur blijadur em andret. (bis)

Ni a yel en eur boumen hon daou
Da veilla na perc'hen Kverjou. (bis)

Oh! evit feteiz na yefot get;
Verc'hoaz, pa vo de, neuze yefet. (bis)

Reneaic ar Glaz a lavare
D'e c'kompagnunez eno neuze: (bis)

Compagnunes, debrit hac evet, (265)

413

Echu eo da berc'hen an eured. (bis)

Reneañ ar Glaz a lavare
Da Erwan Gelard eno neuze. (bis)

Erwanic Gelard ? ma vec'h contant,
Ne rafe bremañ va zestamant. (bis)

Na grit an testamant a guerret,
Na betec ar som a bemp cant scoët. (bis)

Ha gentañ testamant a eure
E voa offr e ene da Zoue. (bis)

Hac e c'horf da veza entervet
En ilis pi'otramant er porchet. (bis)

(266) Va habit eured d'am mateg rian,
E deus bet ganeme calz a boan. (bis)

Ha tri domestiq so bars enty,
Nac un habit du da bep-hini. (bis)

Evit ma laro tud ar c'hontre :
Cetu maro perc'hen al leve. (bis)

Evit ma laro an dud yaouanq :
Cetu arze caon ar vreg yaouanq. (bis)

Doue da bardono an anaon,
E mâ an daou gorf paour var ar scaon. (bis)

Pa n'en dînt get bet en em velet,
E zefont o daou en ur beziet. (bis)

fin.

(Vol. IV, p. 256-266.)
61 str. numérotées.